

Prezegenn Emil GRANVILLE e anv Strollad Breizh da sinadur "Ya d'ar brezhoneg", d'an 22 a viz Ebrel 2009 e ROAZHON.

Un darvoud meur eo evit Strollad Breizh sinañ ar Garta "Ya d'ar brezhoneg". Kalzik a vrezhonegerien a zo e Strollad Breizh bremañ. Muioc'h-mui zoken hag e touez ar re yaouank dreist-holl ! Lod anezho ampart war ar yezh, lod-all o teskiñ, hag an holl, brezhonegerien pe get, tomm o c'halon ouzh ar brezhoneg.

Ur bern traoù hon devez da ober bemdez. Rankout a reomp ober buan. Hag evit se ez eomp buan e galleg. Eskemm mennozhioù, sevel rentaoù-kont a vez aesoc'h deomp e galleg ivez. Mat eo ha ret-mat eo lakaat brezhoneg war paperioù hag er skridoù. Diaesoc'h e vez ober gantañ dre gomz avat e kement doare zo. Gouzout a reomp mat-tre e ranko Strollad Breizh ober strivoù evit ober an aliesañ ar gwellañ gant ar brezhoneg.

Ne fell ket deomp e vefe sinet "Ya d'ar brezhoneg" evit ober brav hepken. Fellout a ra deomp ivez e vefe ar brezhoneg yezh an darempred, yezh ar preder politikel, kevatal d'ar galleg. E Soñj emamp sevel stajoù war danvezioù Breizh a denn d'ar preder politikel e brezhoneg.

Hiviziken e rankimp ober ur plas ofisiel d'ar brezhoneg e-diabarzh hor strollad. Fiziet e vo ar gefridi-mañ d'ur skipailh a-zoare a vo e labour seveniñ ar poentoù dibabet gant ar Garta. Ha mont pelloc'h zoken ma vez tu. Dav e vo deomp kemer amzer da sevel ur vuhez politikel e brezhoneg. Uhelaat hol live yezh ivez, evit bastañ da ezhommoù ar preder. Ezhomm hon do eus barredigezh an holl vrezhonegerien, izili hor strollad kenkoulz ha tud a youl-vat eus an diavaez. Digor-frank eo enta Strollad Breizh d'ar vrezhonegerien o deus c'hoant ober gant o yezh war tachenn ar politikerezh, ar sokialegezh hag an ekonomiezh.

Gant levezon eo enta e sinan e anv Strollad Breizh ar Garta "Ya d'ar brezhoneg". Evit Strollad Breizh ez eo ar brezhoneg unan eus diazezoù pouezusañ broadelezh Breizh ha troet e vefemp da soñjal e vefe an hini pouezusañ zoken. Krouet e oa bet Strollad Breizh e 2003 gant ar pal da lakaat Breizh a-live politikel gant ar broadoù all en Europa. Da betra e servijfe deomp gounid galloudoù politikel nevez ma ne chomfe ket bev ar brezhoneg, ur yezh a dalvoudegezh sokial en amzer da zont ?

Ha gellout a rafemp kaout fiziañs en dud na reont ket gant ar brezhoneg o-unan pa embannont a-hend-all ober strivoù evit kas war-raok ur politikerezh a-zoare evit Breizh ? Setu perak ne fell ket da Strollad Breizh e vije un dislavar etre ar pezh a embann hag ar pezh a ra.

Laouen-kenañ omp o c'houzout e c'hellomp en em harpañ war gouiziegezh Ofis ar Brezhoneg dres evit seveniñ hor pal. Kroget eo hon dilennidi endeo da gas ar brezhoneg war-raok er vuhez sokial el lec'hioù m'int bet dilennet. Bepred o kaout doujañs ouzh ar c'hevredigezhioù a vez war an dachenn, bepred o soñjal er yaouankizoù ha, da gentañ-penn, er c'hlasoù divyezhek. Na c'hortozomp ket un dazont burzhudus avat evit ober gant ar brezhoneg. Poent eo stagañ ganti bremañ! Strollad Breizh a lavar "Ya d'ar brezhoneg !".